

GAVOTEN

MATELIN ANN DALL.

Matelin güisket giz Kemper }
Da zon dirag ann Impalaer : } *bis.*
Eunn tokik du, eur bragou braz,
Justinou herr livet e glaz,
Setu ar potr koz-ni kanfard,
Hanchen 'n he vek, 'n he zorn bombard.

Matelin, gant he viniou,
A zastum tud a vandenniou ;
Troc'ha a ra gant he vombard
D'ar zul, d'ar lun, da veurz ar lard,
Ken a lak enn danz ar potr koz
Ar re iaouank hag ar re goz.

Matelin ann dall, ha pa zon,
Laouenna meurbed ar galon,

Biniaoua toniou ken dous
Ma nij ar zeï hag ar voulous,
Ken na douchont ket ann douar
Boutou Mari goant hag he far.

Etre Paris ha Kemperle
N'euz ket par da vombard Kerne,
Distaga ra toniou dispar ;
Gant-ho pep hini fich he c'har,
Ken a zilam d'ann nec'h ar pri
Hag a ra bordou tri ha tri.

Matelin diwar benn he dol
A lak da c'houezi dru ann holl,
Muzik ker koant ha ken lirzin !
Sec'het a zeu, ezom zo güin ;
Mes gant aon rog ar zardinet (1)
Dalc'h mad, Matelin, dalc'h bepret.

Bombard arc'hantet Matelin
Ra 'vel d'ann dour war ar vilin ;

(1) Les danseurs qui sont à la queue quand la danse cesse.

Distrei a ra he don ker brao,
Trei a ra ha distrei atao,
Mes nikun na c'houlen ehan
Ken na ehano he unan.

Matelin, ha na vel ket tamm,
Ro sardinet da verc'h, da vamm,
Sardinet kaer, ar re gaera !
Arabad eo en em facha ;
Ho güerza ker ne ket ar giz,
N'emaint ket koant d'ar iaouankiz.

Kerkent potret ar zardinet,
Arog ar bal, dorr ho sec'het ;
Kemer gant pres dorn ho mestrez
Goaska dousik dre garantez ;
Ar garantez a lavar *ia* !
Mez Matelin lavar *hola* !

Allaz ! maro Matelin goz,
A rè d'emp dansal deiz ha noz !
Mar klevit c'hoaz ar biniou,
Diredit holl, merc'hedigou,

Fanchik ha Jeffik ar goanten,
Ma rinn gen-hoc'h eur gavoten.

Gen-hoc'h a rinn eur gavoten,
Me c'hoasko c'hoaz war ho torn guënn ;
War ho tornik guënn me c'hoasko,
Karantez beo ken a flammo !
Hag evel dour war ar vilin
Ni droio gant ton Matelin.

Iann KARER,
Labourer-douar.

Trugare da varz Kermorial
En deuz gret Gavoten ann dall
A lake ann dud da zansal !

Dioc'h deon he vez ma he c'hlefe,
Gant ar fougé hen a dridfe ;
Ma, « brao ! brao ! Iann ! » e lavarfe.

KERMARKER, Barz Breiz.

E Keransker, 1 a viz du 1865.

Quimperlé, imp. Th. Clairet.